

(f° 84)

## Philippe Olier.

Jannet ar guzgo zo eun dimezjel  
na ne ra netra gant he cheiel,

Defot nen deus eun inkin arc'hant  
ag eur versit gred a olifant,

eur versit gred a olifant guen  
Da philip Olier dond de goulen.

ar c'huzgo koz a houlene  
Digant philip olier eun deis a woe:

— Philip olier din leveret  
Petra var dro va zi a Klesget?

— Da ober al lez do merc'h kena  
Da ziski ar a ha dimii dar iaouanka.

Pa c'ha philip olier da receo an urchou  
e c'harze Jannet var he zreujou.  
evid broda mouchouerou.

evid ho broda a neud arc'hant  
Da c'holo ar c'halei e vin koant.

evid o broda a lien skler  
Da c'holo ar c'halei var an oter.

Louisa herriou 26 fév: 1851.